

## ▶ PELEC'H - PEGOULZ?

Dalc'het e vo Skol-Hañv 2013 KEAV e lise ar Stêr Aon (lise labour-douar ha liorzhouriezh) e Kastellin.

Div sizhuniad studi a vo kinniget:

- > Prantad 1<sup>añ</sup> (7-13/07/13)
- > Eil prantad (14-20/07/13).

Eus ar Sul da noz betek ar Sadorn, goude pred kreisteiz.

E-pad an div sizhun-mañ e vo degemeret ar vugale 6-14 vloaz gant ur skipailh buhezourien en un «alsh».

## ▶ PEGEMENT?

(Priz ar c'hentelioù, boued ha lojeiz)

Ur prantad staj: 255 €  
Studierien ha tud dilabour: 220 €

Ret eo paeñ an hanter a-raok dont ha kas ar chekenn gant ar follenn-enskrivañ da gKEAV.

Un niverenn stummadur dibaouez  
a zo gant KEAV

## KAMP ETREKELTIK AR VREZHONEGERION

Skol-hañv KEAV a zo anezhi ur bodad tud laouen oc'h en em gavout asambles evit klevet ha komz brezhoneg a-hed an devezh hag e-pad ur sizhun, pe ziv; bevañ e brezhoneg ha reiñ tro d'an deskarded da zeskiñ ar yezh o soubañ er brezhoneg a-hed an amzer.

Anez gouzout diazezoù kentañ ar brezhoneg (ur bloavezh studi pe zaou) n'hall ket staj KEAV dougen frouezh deoc'h. D'an deraouidi e tegasomp soñj e vez aozet stajoù evite er memes mare.

Degemeret e vez bugale gant o zud en ul ALSH (Accueil Loisirs Sans Hébergement).

KEAV zo ezel eus Kuzul ar Brezhoneg.

### Kentañ ha diwezhañ evezhiadenn e galleg

Le camp d'été de KEAV, c'est quatre-vingt, cent personnes heureuses de se rencontrer pour entendre et parler breton. Pour chacun, le faire, c'est un choix, un plaisir: pour respecter cette volonté commune, chacun s'efforce de s'exprimer uniquement en breton. Cet effort est également un élément indispensable de l'apprentissage. Le stage de KEAV est connu pour cela. En s'inscrivant, chacun est donc conscient de l'engagement auquel il souscrit.

### LE BRETON EST LA SEULE LANGUE UTILISÉE PAR TOUS AU COURS DU STAGE.

Le stage ne peut profiter véritablement qu'aux personnes ayant des bases élémentaires suffisantes du breton. Nous rappelons qu'il existe des stages pour débutants à la même période.



KEAV

22 hent Moulouen 29000 KEMPER

Pgz : 02 98 95 59 31

Postel : keav@wanadoo.fr

Lec'hienn : <http://www.keav.org>



# Skol ~ HANV

Mont war-raok  
Bevañ e brezhoneg

2013

KASTELLIN  
7-13 a viz Gouere  
14-20 a viz Gouere

Kamp Etrekeltiek Ar Vrezhonegerion



# ▶ **PETRA VO GRAET ER C'HAMP?** (Eus 9e da 12e hag eus 2e da 5e)

## **Kentañ sizhun**

### ▶ **Distagadur – pouez-mouezh**

Graet e vo anaoudegezh gant brezhoneg a bep seurt broioù o selaou ha kompren enrolladennoù. Pleustret e vo da veizañ lezennoù «muzik» ar brezhoneg KLT ha pleustret da gomz hervezañ.

### ▶ **Kazetenniñ: Ur sizhunvezh evit ober anaoudegezh gant bed ar radio**

Asambles gant animatourien ha kazetennerien Radio Kerne e vo fardet 2 abadenn radio a vo skignet da heul war gwagennoù ar radio. Mont a raio ar skipailh war an dachenn evit atersiñ tud hag e vo savet pennadoù (kronikennoù) da binvidikaat danvez an abadennoù.

#### > **Tañva teknikoù ar radio:**

Komz ouzh ar mikro, preparañ ha kas da benn un interview, skeudenniñ ur c'helskrid gant ar son, sevel kronikoù, lakaat e plas blenier un abadenn...

#### > **Deskiñ implijout ar binviji teknik:**

Son-enroller, meziantoù frammañ...

Ma 'z eus kinngioù kelskrid gant lod (tud eus o familh pe traoù all) gwel a se!

### ▶ **Dañs ha Kan**

Ar rummad «dañs ha kan» a bleustro war an dañs ha war ar c'han da zañsal.

Desket e vo dañsoù a bep korn a Vreizh. Evit pep hini anezhe e vo graet un tamm kinnig, lec'hiet an dañs-se er vro hag en istor, ha desket dañsal anezhi. Ha dañset!

Kanaouennoù da zañsal an dañs a vo kanet, studiañ ha kompren ar c'homzoù da gentañ, ha kanañ anezhe...

Ar pal a vo kanañ ha dañsal war-un-dro...

Pep tra e brezhoneg!

Rummadoù all a c'hellfe bezañ kinniget er sizhun gentañ;  
resisaet e vint war al lec'hienn.

**E pep hini eus an div sizhun ho po da zibab etre:**

**Studiañ ar brezhoneg e kentelioù aozet a strolladoù bihan**

**PE Heuliañ ur rummad hag a bleustro war un danvez a gavoç'h ar roll anezehe pelloc'h.**

### **Ar c'hentelioù war ar brezhoneg**

Renket hag aozet e vezont diouzh live ar stajidi: dre testennoù pe c'hoarioù e vez studiaet ar brezhoneg: ar c'heriaoueg, ar yezhadur, an distagadur diouzh doare pep kelenner. Lakat ar stajidi da gaozeal e mod pe vod, diouzh o live, eo ar pal. An dud ne ouzont ket kompren pe kaozeal brezhoneg aezet-tre ha mat a zo o flas bezañ en unan eus ar c'hentelioù-se.

### **Ar rummadoù war un danvez**

Ar re a oar komz ha skrivañ mat brezhoneg a c'hall mont en ur rummad kentelioù da bleustriñ war un danvez bennaket. N'eo ket un «dra da zibab» e framm ar c'hentelioù ordin; a-hed an devezh e vo labouret war an danvez-se hag e-pad ar sizhun.

Da zibab a zo etre ar rummadoù kentelioù-mañ:

## **Eil sizhun**

### ▶ **Distagadur – pouez-mouezh**

Labourat da wellaat an doare da gaozeal war diazez ar fonologiezh, pleustradennoù. Ar stajidi a labouro evit anaout «muzik» ar brezhoneg, kompren ar sistem reolennoù diazez a zo dioutañ, hag evit reiñ da glevet ar muzik-se.

### ▶ **Deskiñ sevel lec'hiennoù ha blogoù**

Implijout ar binvioù internet ha video. Ober anaoudegezh gant implijoù liesseurt an internet, tapout barregezhioù war ar binvioù teknek evit eskemm gant ar re all. Labouret e vo diwar skouerioù savet gant ar stajidi o-unan: blogoù, pajennoù web, kleweled enlinenn, rouedadoù sokial.

### ▶ **Treiñ**

#### **1. Paliou ar rummad**

Ober anaoudegezh gant an treiñ, dre skrid diwar testennoù teknik, eo pal ar rummad. Pleustret e vo o treiñ a-stroll testennoù deknik hirik a-walc'h. David ar Rouz, a zo troour a vicher, a ray war dro ar rummad, gant sikour kelennerion arall eus ar c'hamp. Degasit ganeoc'h un urzhiataerez hezoug ma 'c'h eus unan, gant ur skridtreter; ha geriadurioù, yezhadurioù brezhonek. Kinniget e vo deoc'h div pe deir zestenn c'hallek (diouzh niver an dud) hag a bleedo get ar mor pe ar merdeñ. Desket e vo deoc'h un doare d'ober ha roet deoc'h dielloù, fitouroù da sikour ganeoc'h.

### ▶ **Kembraeg**

Ar rummad kentelioù war ar c'hembraeg a zo graet gant Rhisiart Hincks, kelenner war ar c'hembraeg hag ar brezhoneg e Skol-Veur Aberystwyth ha gant Ffran Mae, Kembredez anezhi, a zo kelenner e skolaj Diwan Gwiseni.

Evit an deraouidi e vo ar rummad kentelioù-mañ hag evit ar re o devo c'hoant da adkavout an tamm kembraeg oa bet desket gante diagent. Lakat an dud da gomz a vo klasket ober ha deskiñ dezhe-ar frazennoù ordin an implijetañ.

Gwelet e vo pegen heñvel eo ar c'hembraeg ouzh ar brezhoneg, met laket e vo ivez war wel an diforc'hioù pouezusañ a zo etre an div yezh vodern.

Evit heuliañ ar rummad kentelioù-se e ranker bezañ brezhoneger ampart.

### ▶ **Brezhoneg er familhoù**

Skoazellañ ar familhoù a fell dezho ober eus ar brezhoneg yezh ar gêr dre bourchas dezho un nebeut ostilhoù hag aozañ prantadoù eskemm.

Degemeret e vo ar vugale gant o zud.

### **Hag evit an holl:**

**Da greisteiz:** 1/2 eurvezh kan ha dañs hervez kinnigoù ar gelennerien.  
**Goude 5 eur (hervez an deziou):** mont da welet brezhonegerien eus ar vro, sportoù, kaozeadennoù, stalioù-labour a bep seurt, filmoù, pourmenadennoù, c'hoarioù.

**Kavet e vo ar programmoù war lec'hienn KEAV.  
Kaset vint deoc'h ma vezont goulennet ganeoc'h.**